

падобны на мыканне каровы...ад сораму і засмучэння!

#### **ГУЛЬНЯ АДЗІН НА АДЗІН для 2 гульцоў (выкарыстаць зялёны пакет)** (Ілюстрацыя IV)

Гульня ідзе для трох асобных статкаў, размешчаных у форме зоркі. Для выгоды гульні карты могуць быць складзеныя ў стосік. У пачатку кожнага тура СТЭЛКА размяшчаецца па гадзіннікавай стрэлцы. Першы фермер пачынае фарміраванне статка. Затым другі фермер пачынае фарміраванне другога статка. Пасля чаго першы фермер пачынае фарміраванне трэцяга статка. Затым другі фермер працягвае фарміраванне першага статка і т.д. Такім чынам, на стала маюцца тры статкі, якія запаўняюцца напераменку. Калі фермер НЕ МОЖА або НЕ ЖАДАЕ дадаваць карову, ён забірае статак і на яго месцы пачынае фарміраванне новага статка. Пры гэтым астатнія два статкі застаюцца ў ранейшым выглядзе. Калі калода пустая, а адзін з фермераў забірае адзін з статкаў, тур сканчаецца. Ні адзін з фермераў не набірае ачкі з картак пакінутых двух статкаў. Усе астатнія правілы застаюцца ранейшымі.

**Словы падзякі:** Нам жадалася бы падзякаваць кароў усяго міру, бо без іх гэтая гульня не існавала б. Кампанія Hurrican гарантуе, што падчас распрацовак гэтай гульні ні адна карова не папакутавала. Пераклад: Вы гаворыце або пішыце на мове, якой няма ў брашуры з правіламі гульні?

**Не губляйце часу:** перакладзіце правілы гульні Mow і накіруйце іх нам па наступным адрасе: [mow@hurricangames.com](mailto:mow@hurricangames.com). Мы апублікуем іх на нашым вэб-сайце!



# MOW

Ur c'hoari gant Bruno Cathala  
evit etre 2 ha 10 feurmer eus 7  
da 77777 vloaz (da nebeutañ)



#### **KINNIG**

Ar feurmerien a d'olp ar buoc'hed e tropelladoù evit kas anezho d'ar c'hraou. Lod buoc'hed zo leun a gelien en-dro dezho. Setu ma klask pep feurmer en em zizober diouto...

#### **AR PEZH ZD D'OVER**

Bezañ tapet an nebeutañ a gelien ar gwellañ en e graou e fin ar bartiad.

**E pep pakad ez eus 48 KARTENN VUOC'H** ha 74 kelienenn en holl. Skeudenn I ha V 15 buoc'h niverennet eus 1 da 15, hep kelienenn / 13 buoc'h eus 2 da 14, pep a gelienenn ganto / 11 buoc'h eus 3 da 13, gant div gelienenn / 3 buoc'h eus 7 da 9, gant teir c'helienenn / 6 buoc'h ispisial gant un dreistgalloud... ha pemp kelienenn ! / 1 gartenn "BIR" a verk tu-treñ ar c'hoari / 4 c'hartenn gant skeudennoù. (Pakad gwer I da IV – pakad melen V da VII)

#### **PENAOZ C'HOARI**

Ma vez etre 3 ha 5 c'hoarier, kemer ar pakad gant ar c'hein gwer ha meskañ.

Ma vez etre 6 ha 10 c'hoarier, tolpañ an daou bakad ha meskañ anezho.

Da bep feurmer e roer pemp kartenn vuoc'h. Ar c'hartennoù a chom a vez lakaet en ur bern, o zalig kuzhet, e-kreiz an daol. Ar feurmer a grog gant ar bartiad a laka ar BIR dirazañ war-du ar c'hoarier zo a-gleiz dezhañ. Lakaat a ra ur vuoc'h kentañ e-kreiz an daol a-raok mont da glask ur gartenn vuoc'h all er pigos. Goude-se, pep hini d'e dro, e laka ar feurmerien all ur gartenn vuoc'h ganti un niverenn bihanoc'h pe brasoc'h eget hini ar vuoc'h lakaet a-raok. Ur wezh m'hoc'h eus lakaet ur vuoc'h, na zisoñjit ket kemer ur gartenn vuoc'h all er pigos !!!

*Er skouer zo war ar skeudenn II e c'haller ouzhpennañ ur vuoc'h gant un niverenn bihanoc'h eget 7 pe brasoc'h eget 11.*

**Degouezhioù dibar, ar buoc'hed ispisial, gant 5 kelienenn, eus ar pakad gwer** (skeudenn III)

**Buoc'h steuderez a)** Gant ar vuoc'h-se e c'hallit stankañ ur penn eus an tropellad.

**Buoc'h ouesk b)** Gallout a rit lakaat ar vuoc'h-se war ur vuoc'h he deus ar memes niverenn hag an hini merket war ar gartenn. Ne c'haller lakaat ar vuoc'h ouesk-se nemet war ur vuoc'h zo anezhi dija en tropellad hag a zo ganti ar memes niverenn (7 pe 9).

**Buoc'h gant dale c)** Ar vuoc'h-se c'haller lakaat en ul lec'h frank etre div niverenn all. Da skouer, etre 5 ha 9, e c'hall tapout lec'h an niverennoù 6, 7 pe 8.

**Dwallit !** Ma vez gant ar feurmerien ur vuoc'h ispisial, gant 5 kelienenn, eus ar pakad gwer, e c'hallont dizout cheñch tu d'ar c'hoari. Neuze e lakaont ar BIR dirazo, war an tu a fell dezho. Ar feurmer diskouezet gant ar bir a gendalc'h da c'hoari...

**Degouezhioù dibar, ar buoc'hed ispisial, gant 5 kelienenn, eus ar pakad melen** (Skeudenn VI ha VII)

**Buoc'h steuderez d)** Gant ar vuoc'h-se e c'hallit stankañ ur penn eus an tropellad.

**Leue e)** Gallout a reer lakaat ar gartenn-se e-kichen ur vuoc'h hep kelienenn (foñs gwer) e penn an tropellad. He niverenn zo just dindan pe just a-us an niverenn zo war ar gartenn e-tal neuze. Ma vez lakaet a-gleiz d'un niverenn 1 e teu da vezañ 0. (Hag ouzhpenn-se e vo difennet lakaat ur vuoc'h all gant an niverenn 0 en he c'hichen !)

**Buoc'h treut f)** Ar c'hoarier a ouzhpenn ar gartenn-se d'an tropellad ne c'hall ket tapout ur gartenn all er pigos e fin e dro.

**Buoc'h-laezh g)** Ar c'hoarier a ouzhpenn ar vuoc'h-se d'an tropellad a c'hall tapout 2 gartenn er pigos e-lec'h unan hepken.

**Buoc'h foll h)** Ar vuoc'h foll a ya da erlec'hiañ ur vuoc'h gant an niverenn 8. Dalc'hit ar gartenn niverenn 8 en ho torn. Na gemit kartenn ebet er pigos. Keit ha ma chom ur vuoc'h foll en tropellad ne c'hall c'hoarier ebet lakaat ur gartenn vuoc'h hep kelienenn er c'hoari !

**Diwallit !** Ma vez gant ar feurmerien ur vuoc'h ispisial, gant 5 kelienenn, eus ar pakad melen, e c'hallont lavaret piv e vo ar c'hoarier kentañ, hep cheñch tu d'ar c'hoari. Gant ar c'hoarier-se ez adkrog ar c'hoari...

#### DEGEMER AN TROPELLAD EN E GRAOU

Ma NE C'HALL KET ur feurmer pe ma NE FELL KET DEZHAN ouzhpennañ ur vuoc'h, e tastum holl vuoc'hed an tropellad en e graou, dirazañ, o zalig kuzhet, a-raok adkregiñ gant un tropellad nevez. Kement kelienenn zo en-dro d'ar buoc'hed en e graou a dalvez 1 poent mez.

#### DIBENN AN DROIAD HAG AR BARTIAD

Ur wezh tapet buoc'h diwezhañ ar pigos e c'hall ar c'hoari kenderc'hel betek ma vo dastumet an tropellad diwezhañ gant ur feurmer. Evit echuiñ, an holl feurmerien a zegemer en o c'hraou ar buoc'hed a chom ganto en o daouarn. Pep hini a ra ar gont eus niver ar c'helien zo en-dro d'an holl vuoc'hed en e graou, hag a ouzhpenn d'ar sammad-se hini an troiadoù a-raok. Rak meur a droiad a vez en ur bartiad MOW : ma vez betek 100 kelienenn gant ur feurmer e fin un droiad e vo echu ar bartiad. Mont a ray ar maout gant an hini en deus an nebeutañ a gelien ar gwellañ. Gwall alies e klevet ar c'holler o trevezañ blejadenn ar vuoc'h... gant ar vezh hag an dristidigezh !

#### PENN-OUZH-PENN ejened evit 2 feurmer (c'hoari gant ar pakad gwer)

 (Skeudenn IV)

C'hoari gant tri zropellad war un dro, e stumm ur steredenn. Gallout a reer berniañ ar c'hartennoù evit ma vefe aesoc'h. E penn kentañ pep troiad e troer ar BIR evel ma tro an heol. Ar feurmer kentañ a grog gant un tropellad. Hag an eil feurmer gant un eil tropellad. Goude-se ez adkrog ar feurmer kentañ gant un trede tropellad. Hag e kendalc'h an eil feurmer gant an tropellad kentañ, hag all hag all... Evel-se ez eus war an daol tri zropellad a vez klokaet an eil goude egile. Pa NE C'HALL KET ur feurmer pe pa NE FELL DEZHAN ouzhpennañ ur vuoc'h e rank dastum an tropellad hag adkregiñ gant un tropellad nevez en e lec'h hep touch d'an daou all. Pa vo diviet ar pigos ha pa vo dastumet unan eus an tri zropellad gant unan eus ar feurmerien e vo echu an droiad. Poentoù an daou d'ropellad chomet war an daol ned eont gant

feurmer ebet. Ar memes reolennoù zo a-hend-all.

**Trugarez:** Trugarekaat a reomp an holl saout dre ar bed a-bezh rak hepto ne vefe ket eus ar c'hoari-mañ. E c'her a ro Hurrican n'eus bet gwallgaset buoc'h ebet pa oa oc'h aozañ ar c'hoari.

**Treñ:** Komz ha skrivañ a rit ur yezh na weler roud ebet anezhi el levrig reolennoù-mañ ? Na chomit ket da dortal : Troit reolennoù ar c'hoari Mow ha kasit anezho da [mow@hurricangames.com](mailto:mow@hurricangames.com). Embannet e vint war hol lec'hienn genrouedad !

*Gant Ofis ar Brezhoneg eo bet troet ar reolennoù-mañ e brezhoneg.*

